



DEVEZHIOÙ AR GLAD

1 - Peulvanoù



Testoù eus mare nevezoadvezh ar maen int (e-tro 5 000 kent Jesus-Krist). Bez emaint e-touez ar roudoù koshañ lezet gant an Den e Ploveilh.

Kefridioù liesseurt o doa hervez an hendraourion : bevennoù un tiriad, savadurioù liammet ouzh azeulerezh an eiennoù, ha marteze zoken spisverkoù an eurioù pe deiziadurioù.

2 - Stel an Dour Ruz

Ar savadur-mañ a ra dave da flastrerezh, gant tudjentil ha bourc’hizion Kemper e 1490, un ensavadeg kouerion loc’het er Poher. Savet eo bet da vare 500 vet deiz ha bloaz an emgann-mañ, war intrudu an Ao. Yann Gwegen a oa o chom e-kichen.



Kroazioù ha kalvarioù

Eus ar ^{XVI}^{vet} kantved eo kroaz an Trebe ha kroaz Sant Rok, ha hini ar C’hoed eus ar ^{XVII}^{vet}. Eus an ^{XIX}^{vet} eo ar c’hroazioù all, nemet unan hag a zo eus an ^{XX}^{vet}.



3 - Chapel Sant Filiber



Savet e oa bet war-dro kreiz ar ^{XVII}^{vet} kantved. Renevezet e oa bet e-kreiz an ^{XIX}^{vet}, ha goude-se adalek 1995. Ar gumun zo perc’henn warni.

Digor d’ar Sadorn ha d’ar Sul eus 10 eur da 18 eur.

4 - Levraoueg a studi Preder (19 hent Pierre Larhant, Menez Kloeder)

Diazezet e 1958, Preder zo ur gevarzhe sevenadurel he deus da bal diorren ar brezhoneg kempred. Abaoe 2013, e tegemer ar gumun el lec’h-mañ levraoueg dreist ar gevarzhe gouestlet d’an holl henyezhoù ha nevez yezhoù indez-europek, rann ar yezhoù keltiek o vezañ an hini pourvezet ar gwellañ.

Digor d’ar Sadorn ha d’ar Sul eus 14 eur da 18 eur.

5 - Meilh Rozulien

Eizh milin a oa gwechall o treñ er gumun.

Ar vilin dour-mañ, bremañ perc’hentiezh an Departamant, zo o paouez bezañ adsavet hag adlakaet en arc’hwel gant kevarzhe Milinerion Rozulien. Ouzhpenn he roll kentañ da genderc’hañ bleud, ar vilin a bourvez ivez tredan hag ur sal diskouezañ zo bet digoret.

Degemeret e viot gant emyoudi ar gevarzhe evit gweladenniñ ar vilin hag evit ur paouez lipouz.

Digor d’ar Sadorn ha d’ar Sul eus 14 eur da 18 eur.



Trugarez da deurel pled ouzh an endro !

Evit muioc’h a stlenn a-zivout istor ha glad ar gumun, lennit levr Jean-Pierre Royant e gwerzh en ti-kêr : *Plomelin : 3 000 ans d’histoire*.

6 ha 7 - Kenkiz galian-roman - kibelldioù

Ur genkiz ec’hon galian-roman a oa savet e Gorre-Bodivit en eil ha trede kantved hon oadvezh.

Ar c’hebelldioù lec’hiet war vord ar stêr a oa un dalc’h anezhi. Ratreet int bet e 2012.

Daou henoniour, unan anezho o vezañ an **Ao. Jean-Charles Arramond** en deus renet koulzadoù ar furchadennoù war al lec’h, a ginnigo d’ar weladennerion dismantrou ar genkiz, digor d’ar foran evit an degouezh, hag arc’hwel ar c’hebelldioù, **d’ar Sadorn ha d’ar Sul eus 10 eur da 18 eur.**



8 - Lestremeur



Kouldri

E-pad pell e oa stag ouzh kastell An Estreveur. Da-heul susitoù ha rannoù e vo staget ouzh maner Bodivid, hag ar gumun zo perc’henn warnañ bremañ. Eus ar ^{XVII}^{vet} ha ^{XVIII}^{vet} kantved eo. 998 toull-koulm zo ennañ. Derezioù maen a ya d’ober an doenn. Er vro eo unan eus ar c’houldrioù er stad wellañ.

Ar forn-vara

Eus an ^{XIX}^{vet} kantved eo. Prenet e oa bet gant ar gumun e 1999. Poazhet e veze bara enni evel-just, met lakaet e veze d’ober ti-kouez ivez. Distrujet e oa bet evit ul lodenn anezhi e 2005 hag emeur o paouez adsevel anezhi.

Ar c’houldri hag an ti-forn a vo digor d’ar c’hevredig Sadorn ha d’ar Sul eus 10 eur da 18 eur.



Ar poull-dour - Lakaet e oa d’ ober ur pesklenn gant tud kastell An Estreveur.

Ar feunteun hag ar stêr - Eus an ^{XIX}^{vet} int moarvat.

Ur wezenn heverk

O tistremen al lenn war du an Odet, e c’hellit gwelout ur morgoad dezhañ un adeiladezh souezhus, ur wezenn bupli du gant pemp kef neuz ur stlejvil dezho. Ar wezenn-se zo rummet « heverk » e Breizh.



9 - Glad Ploveilh



Glad Ploveilh zo ur gevarzhe empleget e nevesadur ha trezalc’h ar glad bihan a vo bezant disadorn ha disul war lec’hienn Lestremeur .

D’ar Sadorn ha d’ar Sul eus 10 eur da greisteiz ha eus 14 eur da 17 eur.

An degouezh eo da gejañ outo evit eskemm war ar sevenedigezhioù hag ar raktresoù.

Darempred : 06 65 38 91 11 - plomelin.patrimoine@gmail.com

10 - Skeudennoù kozh en ti-kêr

Glad Ploveilh a ginnig un dibab skeudennoù e sal an dimezioù en ti-kêr.

Digor d’ar Sadorn eus 16 eur 30 da 19 eur 30 ha d’ar Sul eus 10 eur da greisteiz.



11 - Levraoueg Pennanros (tachenn brevez)

Digor e vo levraoueg ar maner.

Gweladennoù da 14 eur, 15 eur, 16 eur.

Trugarez d’ar weladennerion a en em gavo e enkerzh ar maner da zoujañ d’an eurvezhioù-se.

An dinaz a drugareka evit o ferzhiadur hegarat, ar berc’henned hag ar gwirvoziaded a skoazell da zigeriñ d’ar foran lec’hioù ‘zo deskrivet el levrig-mañ.